

AR VUHEZ KRISTEN



AVENUE DE LA MARNE

28

LORIENT

C/C. POSTAL N^o 209-81

SUR

NANTES



Allo ! Allo !!



E-touez hol lennerien eo e-
chuet o c'houmanant e miz Gwen-
golo pe e miz Here, ez eus c'hoaz
hiniennou ha n'o deus ket paet,
*Na zaleit ket, mar plij. Poënt eo
paea...*

HA DREIST-HOLL

klaskit d'eomp lennerien nevez. Trugarez d'eoc'h !

Koumanant ordinal : 6 l.

*Koumanant a enor : 10 l. gant perz e 365 operenn a vez
lavaret bep bloaz evit hor madoberourien.*



Eur c'helou mat

evit Breudeur ha C'hoarezed
Trede-Urz S. Fransez.

ADALEK MIZ GENVER,

e vo moulet adarre bep miz

Kenteliou Sant Fransez.

ar gelaouenn-se a vo kavet enni

1^o ar 16 pajenn a-ziabarz eus *Ar Vu-
hez Kristen*; 2^o 8 pajenn ouspenn evit
rei d'an Drede-Urz Kenteliou Hon Tad
S. Fransez ha keleier ar Breuriezou.

TAOLIT EVEZ MAT : Ar re o dete
c'hoant da gaout *Kenteliou S. Fransez* e

lec'h *Ar Vuhez Kristen*, a zo pedet d'er rei d'eomp da
anaout, pa zigasint d'eomp o arc'hant evit ar bloaz nevez.

Kenteliou S. Fransez a gousto evel *Ar Vuhez Kristen* :

Koumanant ordinal : 6 l.

Koumanant a enor : 10 l. ; gant perz e 365 oferenn.

Pedenn gaer d'ar Werc'hez Vari



« *Kaout a ra d'eoch, va
« Mamm, hoc'h eus rôet d'in
« kalz grasou betek-hen. Ya,
« gwir eo; met dleout a rit
« d'in muioc'h eget n'hoc'h
« eus rôet. Digarezit ac'ha-
« noun, ma plij, ha selaouit.*

« *Hervez al lezennou graet
« gant an dud, ar vugale o
« deus gwir war madou o
« mamm, dreist-holl ma n'he
« deus bet ar madou-se nemet
« evit he bugale.*

« *Sellit pegement ez oc'h
« pinvidik ! Spered an den
« n'hell ket her c'hompren.
« Rouanez ez oc'h en Nenv ha*

« *war an douar ; choui eo tenzorierz an holl c'hrasou, ha
« Doue E-unan a sent ouzoc'h. Mat ; met bezit sonj n'hoc'h
« eus ket ar madou-se evit o mirout, met evit o rei d'ho
« pugale, hag o rei d'in-me, ar brasa eus ar bec'hereien.*

« *Daoust hag e vefec'h ar pezh ma'z oc'h hepdoun-me,
« hep ar bec'herien henvel ouzin? Daoust ha n'eo ket evit
« hor prena en deus ho Mab en em c'hraet Den ha kemeret
« ac'hanoc'h da Vamm ? Her gwelout a rit eta, kement tra
« a zo d'eoc'h a zo ivez d'in-me.*

« *Ar pezh hoc'h eus rôet d'in, n'eo netra e-kenver ar pezh
« a zo d'eoc'h. Sklaer eo : c'houi a zo em dle hag evit kalz
« Petra hoc'h eus da respont?*

« *Selaouit, o Mamm, ret eo d'eoc'h rei d'in va goulenn.*

« Ma rit skouarn vouzar, petra a lavaro an dud? Pe n'hellit
« ket rei d'in va goulenn, pe ne fell ket d'eoc'h digemer va
« fedenn.

« N'hellit ket? Den ebet ne gredo an dra-ze, re anavezet
« oc'h.

« Ne fell ket d'eoc'h? Gwelloc'h e vefe klevet n'hoc'h
« eus ket galloud.

« Penaos ? Va Mamm, mamm an holl c'hrasou, mamm
« a druez hag a bardon, n'he deus ket plijet d'ezi selaou
« unan eus he bugale!... Petra a vo lavaret ouzoc'h? Sonjit
« e kement-se, ha respontit, ma c'hellit, o va Mamm, ar
« wella eus an holl mammou! »

Pedomp an eil evit egile

Setu aman an intansionou a zo bet digaset d'eomp er miz tre-
menet, ar re varo a zo bet goulennet pedennou evito, ha hanoiou
hor madoberourien. Ni hor bezo sonj anezo en hon oferennoù hag
en hor pedennou, ha goulenn a reomp ivez digant hol lennerien
pedi evito.


INTANSIONOU. — Yec'hed eun den klanv ; eun afer diaes ;
evit ma roio an Aotrou Doue d'eomp sklerijenn ha skoazell ; eur
mision e Etel (9-26 Du) ; eur mision er Gilvineg (9-26 Du) ;
evit ar peoc'h en eun tiegezh ; yec'hed va daou bugel bihan.

HON ANAON. — *Plouzeniel* : Jeanne Abjean, Marie-Yvonne
Tygréat, Marie-Jeanne Tranvouez ; Angèle Le Gall, Catherine
Kermarrec ; *Ar Folgoet* : Philomène Simier ; *Lokeltas* : Marie-Jo-
sèphe Cadoret ; *Plabenneg* : Catherine Kermorgant, Catherine Ro-
zec ; *Kommana* : Marie Jointret.

HOR MADOBEROURIEN. — *Plabenneg* : 5 l. ; *la Vraie
Croix* : 20 l. ; *re-all* : 10 l. ; 5 l. ; 20 l. ; 50 l. ; 500 l. evit ar
misionou, 100 l. evit ar misionou.

Hor madoberourien hag ar re-holl o deus digaset d'eomp ko-
manantchou a enor.

Pegen mat eo servicha Doue



P'en em gavas
Gwennole e chapel
ar c'hloerdi, an ofe-
renn a oa komaset
abaoe eur pennad...

Ar pezh a skoas
e spered da genta, a
voe gwelet ar gloa-
reged, gwisket gan-
to ar gams wenn, o
stoui war have ar
chapel hag o chom

astennet e-pad ma kaned warno Litaniou ar Sent.

Chom a reas mantret... Pedet e oa bet gant familh Ronan,
e vignon, da zont d'ar gouel, ha n'en doa ket kredet lavaret
nann.

Pell 'zo koulskoude, ne zaremprede mui Ronan. Er skolaj
e oant bet eiz vloaz er memes amzer, er memes klas, met
da fin o studi, pep-hini a oa aet eus e du. Ronan, bet atao
fur, mat da bedi, a yeas war eün d'ar c'hloerdi.

« Paourkaez paotr, a sonje Gwennole.. Yec'hed, yaouan-
kiz, pinvidigez, spered digor, ne vank netra d'ezan, hag ez
a e-pad c'houec'h vloaz d'en em guzat etre mogerioù uhel ar
c'hloerdi, evit beza petra ? Beleg !... N'eo ket brao en deiz
hirio micher eur beleg !... »

Met, e-pelec'h eman Ronan ? Penaos hen anaout e-touez
ar re-all ? Ah ! ya. Dougen a dle eur gams kaer, graet
d'ezan gant e vamm, ha Gwennole da sellet ouz ar gamsou
broudet a zouge ar gloareged...

Echu al litaniou...

Ha setu ar gloareged en o sav.

Anaout a ra Ronan, hag e zaoulagad hiviziken a baro
warnan betek ar fin :

« Ya, ya, emezan, perak eo aet hennez da veleg? Perak
koll evel-se e vuhez ? »

Fin a zo d'al lidou sakr, kanet eo an *Te Deum*, ar veleien yaouank a zo aet etrezek ar zakreteri da ziwiska o dilhad oferenn...

Gwennole a red evit gellout lavaret buan eur ger da Ronan ha mont kuit da-c'houde... Her c'haout a ra, hag e c'houlenn digantan en eun doare goapaüs eun tammig :

« Hag ez out eürus e gwirionez ? »

— Ya, dreist ar pezo a c'heller kompren ha lavaret.

— Mat, kendalc'h da veza eürus ?

— Ha perak ne badfe ket va eürusted ?

— Kredi a rez n'az pezo ket a geuz diwezatoc'h ?

— Nann, biken... Selaou, Gwennole; ma karez, va bennoz kenta a vezo d'it. »

Gwennole en devije c'hoant da respont : « Ne dalv ket ar boan, » met ne fell ket d'ezan hirio ober poan da Ronan, hag e stou eun tammig e benn da reseo bennoz e vignon.

— Neuze emaout o vont breman da guitaat da gerent ? Da vont da belec'h ? »

— N'ouzoun ket c'hoaz ; d'eur barrez war ar meaz, emichans ; lavaret a rin d'it, pa vezin hanvet. »

P'eo aet er-maez eus ar c'hloerdi, Gwennole a sonj adarre :

« Ret eo e vije kollet e benn gant Ronan. Da 25 vloaz, dilezet pep tra evit mont da veva en eur c'hoz-toull bennak. Oh ! spontus eo. Evidoun-me ne rin ket evel-se. D'in-me plijadureziou ar bed ! »

Pemp bloaz a zo tremenet abaoe. Gwennole en deus tanvaet plijadureziou ar bed. E pep lec'h eo bet o klask anezo. Met siouaz evitan ! Eürusted n'en deus ket kavet. Fastet eo, ar paourkaez a zo anezan. Blaz c'houero a zo gant plijadureziou ar-bed.

Eun deiz, enouet, tenval e benn, ez a da skei war dor e vignon Ronan :

« Penaos en em gavez aman e-touez al labourerien douar ? »

— Eürus-bras. »

Hag e gwirionez, e dal, e zremm, e zaoulagad a verke e oa eürus.

— Lavar d'in, penaos e kavez an eürusted ?

— O karet Doue hag o teski d'ar re-all e garet. Setu aze alc'houez an eürusted. »

— Ha koulskoude n'eo ket kaer da bresbital. E ti da vamm eo bravoc'h an traou.

— Neket madou an douar-man eo a garg ar galon, met ar garantez evit Doue.


— Lavaret mat a rez. Evidoun-me, kaer am eus bet redet a bep tu, n'em eus kavet na peoc'h na joa ar galon. »

Hag an daou vignon a chomas pell da gomz etrezo, nann diwar-benn trouz ar bed, met diwar-benn traou an ene.

Hag a-raok mont kuit, Gwennole a zaoulinas dirak Ronan, en eur lavaret d'ezan :

— « Ro d'in da vennoz. Ezomm am eus da veza sikouret gant gras Doue. »

Y. U.



MICHEROUR...
LABOURER-
DOUAR...
MORTOLOD...

DA LABOUR,
graet er stad a
c'hras, a zo talvou-
dus-bras dirak

Doue, henvel ma'z eo ouz hini
Jezuz, « Mab ar c'halvez » e
ti Nazared.

DA LABOUR a zo eun tenzor, santela anezan... ha bep
mintin

KINNIG ANEZAN DA ZOUE !

AR PEZ A DLE PEP KRISTEN OBER

Pa'z eer e-barz eun iliz :

Ober ar jenuflexion, mont war an daoulin hag ober da vihana eur bedennig.

P'en em gaver gant eur beleg o kas an aotrou Doue d'eun den klanv :

Mont rak-tal war an daoulin.

P'en em gaver gant eun interramant :

Saludi ar groaz hag ar c'horf maro.

Pa vezer en eun interramant :

Chom sioul e pep lec'h, heulia an oferenn gant devoision ha pedi evit an ene eat dirak Doue.

Pa dremener dirak eur groaz pe eun iliz :

O saludi hag ober sin ar groaz.

P'en em gaver gant eur beleg pe eul leanez :

O saludi ha kaout resped evito.



EUR GENAOUEG LAKET EN E BRAS GANT EUR MICHEROUR

Eur franmason a oa eun deiz oc'h ober eur gonferans diwar-benn ar relijiused. E. pad eun eur bennak en doa glaoared warno ha kontet diwar o fenn mil seurt geier ha sotoniou.

— « *Den n'en deus netra da lavaret eneb ar gonferans ? a c'houlennas ar prezidant e fin ar brezegenn.*

— *Eo, Me ! a lavaras rak-tal eur Micherour, en eur sevel e zourn.*

— *Plas d'ezan ! eme ar prezidant.*

Hag ar micherour, gwisket paour-paour, a yeas a-dreuz ar bobl betek war al leurenn. Epad an amzer-se, ar franmason hag e dud a c'hoarze etrezo. Paour-kaez seurezed, a sonje-i, ma n'eus nemet an truilhek-se evit o difenn !

Met ar micherour a ouie mat petra en doa da lavaret. E berr gomzou, gant eur vouez reizet mat.

« *Ar c'hlenved, eur c'hlenved bras, an diphtérie, a oa em zi, emezan. Eul leanez yaouank a zo deut anezi he-unan d'ober wardro va fried ha va merc'h. Va fried a zo pareet, va merc'h ivez he deus kavet ar pare. Al leanez yaouank a zo maro.* »

Ha, seder, e tiskennas diwar al leurenn, e-pad ma strake an holl o daouarn d'ezan. Ar Franmason genaouek, mantret, ne gavas seurt ebet da respont, hag en enn dennas buana ma c'hellas.



Fr. De Jh.

Resped d'am Mamm

N'eus ket pell 'zo, e voe gwelet eun den yaouank a 17 vloaz, eur chapel en e zourn, o pignat war e zaoulin gant an hent a ya eus Honfleur da chapel Itron-Varia ar C'hras.

Pa voe degouezet er chapel, e zaoulin a oa leun a wad. Mont a reas koulskoude betek skeudenn ar Werc'hez, hag eno e chomas pell da bedi, an daërou en e zaoulagad.

Eur beleg en em gavas war al lec'h :

« *Perak, emezan, hoc'h eus kemeret kement-se a boan evit sevel betek aman ?*

— *Daoust ha n'hoc'h eus ket bet kelou, a respontas ar paotr yaouank, eus ar gwalleur c'hoarvezet dec'h war ar mor. Eus tri den yaouank, daou a zo bet beuzet, unan hepken a zo bet saveteet. Henez eo me va-unan !*

Va zaou mignon ha me a oa bet resevet daou zevez 'zo evel « bacheliers ». Evit enori an dro vat bet ganeomp, e teuas en hor sonj ober eur valeadenn war vor. Mestr ar vag a c'houlennas diganeomp gortoz eur pennadig, rak sevel a rae ar gwagenn eus an eil tu d'egile. Siouaz ! ar yaouankiz a ra fae war an aliou fura ; ha setu ni war-raok o kana hag o farsal.

Unan eus va mignoned, goude meur a gomz lous, a yeas betek ober goap eus ar Werc'hez Vari : Serr da c'henou, a

lavaris d'ezan, c'hoarzomp ha lavaromp bourdou, met resped d'am Mamm !


A-boan em boa echuet, setu ar vag eilpennet, ha ni hon tri er mor ...hep gouzout neuial. Kollet eo bet an daou all, ha chomet me va-unan. Kredi start a ran em eus bet ar c'hras-se dre m'am boa bet difennet enor ar Werc'hez santel. Deuet oun war va daoulin d'he zrukarekaat, rak ne oan ket neuze e stad da vont dirak an Aotrou Doue.

Mil bennoz d'ezi ! »



2 A VIZ DU

11 A VIZ DU



*Dalc'homp sonj !
Pedomp evit hor
re varo !
Gounezomp evito
induljansou
niverus !*

N.B. — Adalek kreisteiz,
d'ar 1 a viz Du, betek han-

ternoz eus an 2, e c'heller gounit evit ar re varo eun induljans plenier, bep taol ma 'z eer d'eun iliz da bedi evit ar re varo hag e intansionou Hon Tad Santel ar Pab. — Ret eo ouspenn mont da gofes ha da gomunia.

Ar Skol Unik

PERAK EO FALL HA PERAK N'HON EUS
KET EZOMM ANEZI.



— Eus ar skol a fell d'ar framan-soned sevel, n'hon eus ket a ezomm. Perak 'ta ?

Ma vent selaouet, e rofent d'eomp da gredi ne vefe mui den dizesk er vro, ma vefe kaset an holl vugale d'o skol, ha dre-ze e vefe an douar evel eun doare baradoz, eun dudi beva ennan, rak ne vije mui klevet komz eus an torfejou hol laka da skrija :

« Evit pep skol nevez digoret, emezo, eur prizoun a c'hell beza sarret. »

Eur gaou n'eo ken, ha n'emaoc'h ket hep gouzout nag a daoliou fall a vez graet bemdez er vro. Ha gant piou e vez graet an taoliou-se ? Re alies gant bugale ha yaouankizou ha graet gant seulvui a ijin m'o doa ar vugale pe ar yaouankizou muioc'h a zeskadurez, a zeskadurez hep kelennadurez kristen.

Met lakeomp ne vefe ket a dorfejou ken, daoust ha gwir eo na vo mui tud sizesk, p'o devezo ar vugale darempredet o skol ?

Ne gav ket d'in. Ar c'hontrol eo a c'hoarvezo, kollet e vezo eur c'halz a sperejou bras e-lec'h lakaat an niver anezo da vont war vrasaat.

Ha setu aman perak.

Gouzout a rit o deus c'hoant paeroned ar skol unik e vefe graet d'an holl vugale diwar o 12 vloaz tremen bep bloaz eun espez exam-
min, pe, mar kirit, eun espez barnedigez evel ma vezo da fin ar bed. En eun tu, en tu dehou moarvat, e vo lakaet an denved, d. l. e. ar vugale lemm o spered, ar vugale a-bred hag a zesk ar pez a geront; en tu kleiz e vo lakaet ar bouc'hed, d. l. e. ar vugale n'eo digor a-walc'h c'hoaz o spered, pe abalamour m'int bugale d'an dud-man-
tud hag e klevint an examinatourien o lavaret d'ezo : It pell diou-
zomp d'al lec'h a gerot, n'oc'h mat da netra, pe da vihana n'oc'h mat nemet da ober eur c'houer pe da ober an vicher bennak war ar meaz. Pebez fritadenn evit ar gerent reseo o bugale en o zi d'an oad-se, goude beza o roet d'ar c'houarnamant ez vihanik !

Ha gwir eo n'o doa ket ar vugale spered a-walc'h evit kender-
c'hel o studi ? N'ouzoun ket, met ar pez a ouzoun eo, ez eus kalz a vugale ha n'oa ket digor abred o spered pe ne gariet nemet c'hoari er skol hag a zo deut da veza goude-se tud habil-bras: Petra

e vije deut Pasteur da veza, m'en dije ranket paseal eun examin d'e 12 vloaz, Pasteur, ar medisin bras en deus kavet an tu da barea kement a glenvejou ? Er skol ne gare nemet dua e gaiserou gant desinou netra. Moarvat, e vije bet kaset da beinturer ; n'eo ket eur vicher fall azezi... dit ar micherour, p'en em denner mat enni, met nag a dud a vije bet marvet hag a varvje c'hoaz a-raok o foent panevetan...

Petra e vije deut *Napoleon* da veza, Napoleon hag en deus renet keit all war hor bro ha lakaet rouaned ar broiou all da zouja d'ezan dre ar brezelioù bras a reas hag ar viktoriou kaer a c'hounezas warno ?

Er skol..., zoken e skol an ofiserien, ne voe ket kavet danvez eun ofiser ennan. Moarvat, gant eur skol evel-se, e vije bet kavet da guituilh delioù panez en enezenn Corse.

Ha Berryer, petra vije deut da veza ? Berryer, eun alvokad brudet, mar deus bet unan.. Moarvat, e vije bet graet anezan eun trouc'her buzug, peogwir er skol, er penn kenta, ne rae nemet koll e amzer, gwella peza a zo eo ne lakeas ket e vistri da goll o fenn... Hag evel-se evit eur c'halz a dud all hag o deus graet brao-bras o zreuz war ar tamm douar-man, daoust m'oa marteze eun tammig pout o spered en o bugaleach.

**

Eus ar skol-se a fell d'ar framansoned sevel, n'hon eus ket ezomm, ha perak 'ta c'hoaz ?

Abalamour ma vezo lammet diganeoc'h, tadou ha'mammou a familh, ar gwir hoc'h eus war ho pugale :

« D'comp int, a livirit, rak roet hon eus d'ezo ar vuhez hag o savet eus hor gwella.

— Hopala... eme ar framansoned, na dit ket re vuan. Ho pugale d'eoc'h? met fasia a rit, ho pugale a zo d'ar c'houarnamant a-raok beza d'eoc'h-c'houi...

— A gav d'eoc'h ?

— Pa lavaromp d'eoc'h.

— Petra... met m'am eus c'hoant e vefe va mab kouer evel doun, kalvez evel doun, m'am eus c'hoant e vefe va mab medisin pe veleg, ha m'en deus c'hoant e-unan da vont war eur vicher all, n'eo ket d'comp-ni pe d'ezan eo da choaz... ?

— O ne... o ne... d'comp eo dibab ha choaz d'ezo ar vicher a gavimp ar gwella evito, rak ni eo hon eus paet ar skol d'ezo, ne chom ganeoc'h nemet hon trugarekaat eus ar vad hon eus graet d'eoc'h....

Ha gwir eo an dra-se ? Met ma vez savet eur skol unik, e vo kaset ar vro d'ar bern. Dija ne da ket gwall-vrao ar stal en-dro gant ar vro, met he stal a yelo hep-dale da stalig hag ar stalig da netra.

E pevar bloaz ha daou ugent, da begement e kav d'eoc'h eo aet d'ar c'houarnamant ar skoliou laik ? Eur siseurt : eus a 30 million

d'eur miliard hanter hepken... hag ar skol a c'houenn ar framansoned, a yelo tost da 5 miliard, wara leverer. E-pelec'h an diaoul e vo kavet an arc'hant bras-se, pa vank ar Frans 400 miliard abaoe ar brezel ha pa rank kaout bep bloaz evit mont en-dro 40 miliard. E-pelec'h e vo kavet an arc'hant-se ? Gortozit, m'hel lavaro d'eoc'h, ha ne vezin ket nec'het hag hep aon ebet c'hoaz da fasia : ...en ho kodellou pe en ho lereier gloan, mar doc'h eus...

Ha ne vo ket diaes d'ar c'houarnamant da-c'houde beza brokus diwar goust ar Sant, evel ma leverer. Ha c'hoaz, sur oc'h e vo brokus en ho kenver ? Ne gav ket d'in. Ma ne blij ket d'eoc'h o skol ha ma chom c'hoaz a-sav ar skoliou kristen, ha chom a raint en despet d'o fallagriez, e rankot kas di ho pugale ha paea evito eur wech muioc'h, hag an arc'hant ho pezo roet d'ar c'houarnamant, a vezo implijet evit skolia bugale ar vourc'hizien hag ar vondianed.

Gwelet a rit breman, pebez tra gaer a fell d'ar framansoned : Laza ar relijion, digristena ar vugale, lemmel ho kwiriou hag hoc'h arc'hant diganeoc'h evit skolia ar re-all.

Ar skol unik n'eo etre daouarn ar Framansoned nemet eun arm evit ober brezel d'an Iliz ha da Zoue. Met kaer o devezo, ne deunt ket a-benn anezo. Bolcheviked ar Russi o deus klasket mouga ar feiz er vro-se.

N'o deus espernet netra evit kas da benn o *labour diaoulek*... ha padal e rankont anzav en o c'hazetennou n'eo ket mouget ar feiz c'hoaz, kuzet doun-doun ma 'z eo e kalon ar bobl. Ar veleien a vilierou a zo bet lazet pe harluet, hag ar bolcheviked en o c'hazetennou a wel gant estlamm beleien nevez o tont, beleien hag a oar komz d'ar bobl ha n'o deus aon rak o skeud, pa gredont embann uhel fallagriez an dud difeiz. Gwallgaset e vezont, n'o deus na ti nag oz, tamm bara ebet da derri o naon, ne c'hellont ket tostaat ouz kerioù a zo, met an dud fidel a ya d'o heul hag o ilizou a vez leun chek ganto. Prosessionou euzus, goapaus evit kement tra zakr, a vez graet, hag ar bobl ouz o gwelet a ya da guzat ha da bedi, leun a fizians e vezint eun deiz dilivret eus an dud daonet-se.

En o skoliou ne reer nemet goap a Zoue, met er familhou ar gerent a gendalc'h da zeski o c'hreansou d'o bugale.

Kement-se a zo bet diskleriet n'eus ket pell gant ar re o deus gallet tec'het eus an ifern bolchevik, hag ar re a zo nevez bet er Russi, a zo a-unan evit lavaret ez a feiz ar gristenien war gresk, seulvui ma vez graet an heg outo, seulvui ma vezont persekudet... ha fizians o deus da welet an trec'h hep-dale d'ar C'hrist, o Salver.

Evel-se en hor bro, kaer o devezo ar framansoned ober brezel d'ar relijion, ma kirit chom atao start ha divrall en ho feiz, an trec'h a vezo da Zoue war Satan, d'ar gristenien war ar framansoned, met neuze, hep aon ebet, enebomp ha stourmomp ouz kement tra fall a fell d'ezo da ober, anez emaoamp e riskl, hep-dale, da welet hor bro Frans o tont da veza eun ifern beva enni, evel ma 'z eo er Russi....

TREMEUR.



AN AOTROU DUPARC, eskob Kemper.

Beleget d'an 20 a viz C'hovevrer 1880 ha sakret eskob Kemper d'ar 25 a viz C'hovevrer 1908, an Aotrou Duparc, an eskob ken karet gant an dud fidel eus e eskopti, en deus graet, d'ar 11 a viz Here diweza, daou gouel kaer-meurbet : gouel e hanter-kant vloaz belegach hag hini e bemp bloaz war-nugent a eskob.

D'an Eskob karet, Ar Vuhez Kristen a ginnig, gant he doujans, he gwella gourc'hemennou hag he hetou a yec'hed hag a vuhez hir.

EVIT BEZA SALVET,
EO RET ANAOUT.....

INKARNASION - REDAMSION

DIWAR-BENN AR PEC'HEDE ORIJINEL.



« Penaoz, a lavar meur,
« e c'hellan-me beza ka-
« blus eus eur pec'hed
« graet pell a-raok m'oun
« bet ganet ? »

RESPONT :

Biskoaz n'he deus lavaret an Iliz ez omp kablus eus ar pec'hed orijinel. Ne vez da respont nemet eus ar pezh a raer. Ha me ho kantifi da ziskouez d'in e-pelec'h ho peus kavet, e pe-seurt leor ho peus lennet he deus biskoaz lavaret an Iliz hon cus graet ar pec'hed-se. Eun den hag a lavarfe da Zoue : « Va Doue, pardon a c'houlennan diganeoc'h evit ar pec'hed orijinel ;

keuz-bras am eus da veza her graet. » hennez a dremenfe evel unan ha n'eo ket mat e benn.

Perak ?

Abalamour ma'z omp bugale, heritourien Adam maro er baourentez vraza, e teuomp war an douar paour-bras, ni ivez, hon ene kollet ganti ar c'hras hag ar santelez. Koulskoude n'omp ket kablus a gement-se ; an dra-se avat ne vir ket ouzomp da veza paour evelato, e-lec'h ma tliemp beza pinvidik-bras o tont er bed-man, hervez mennoz kenta an Aotrou Doue.

Eur c'hrouadur hag en deus e dad kollet e zavez hag e vadou, n'eo ket kablus eus ar baourentez a gouez warnezan ; an dra-se koulskoude ne vir ket outan da veza paour, hep na c'hellfe klemm nag ouz an Aotrou Doue nag ouz den all ebet, nemet ouz e dad ;... e dad a zo e dad ; hervez al lezenn eta eo heritour d'ezan en e baourentez evel en e vadou.

SETU AMAN C'HOAZ EUR GWALL LAVAR ALL DIWAR-BENN AN DROUG EN DEUS AR PEC'HED ORIJINEL TENNET WARNOMP.

— « Perak, eme lod eus an dud, perak n'en deus ket an aotrou Doue renket ha kempennet an traou en eun doare « ma n'he defe ket fallentez ha dizentidigez lod eus an dud, « tennet droug war lod all ? »

Perak ?...

Abalamour n'omp ket Elez. An Elez a zo bet krouet holl war eun dro, war ar memez taol, pep-hini evitan e-unan, hep beza da respont eus ar re-all : rak evit an elez, n'eus familh ebet : na tad, na mamm, na bugale, na kerentiaj etrezo.

Rak-se, kerkent echu an amprou deuet d'ezo a-berz Doue, hag echu ivez ar brezel savet etrezo diwar-benn kement-se, setu i taktal aet d'al lec'h o deus meritet : an ifern pe ar Baradoz da-virviken.

Met dishenvel eo an traou evit an dud. N'int ket deuet holl war an douar en eun dro, en eun taol, evel an Elez.

A-nebeudigou e teont hag e teuint war an douar, betek fin ar bed. Evit an dra-se eo en deus Doue krouet ar familh.

Etrezo eta ez eus eul liamm start : tad, mamm, bugale. Rak-se o deus ezomm an eil eus egile. Eur c'hrouadur ne c'hell ket beva hep e vamm !

N'en em glemmomp ket ouz Doue da veza douget a' lezenn-se hon eus da respont an eil eus egile. Kement-se a zo graet mat. Ma kouez droug warnomp abalamour d'al lezenn-se, nag a vad ivez a gavomp ganti !

Panefe al lezenn-se, biskoaz n'hor befe anavezet na gwelet eur bern traou kaer ha burzudus a weler breman war an douar. Karantez eur vamm e-kenver he bugale ; labour ha poan an tad evit sevel e dud ; bolontez nerzus ha kalonek al leanezed hag ar visionerien a ya d'ar broiou pell evit savetei o c'hoarezed hag o breudeur ; hardiziegezh dispar ar soudarded a ro o buhez evit difenn o bro.

Ha kant ha kant tra all.

Nann, n'en em glemmomp ket ouz an Aotrou Doue ; er c'hontrol, en em glemmomp kentoc'h ouzomp hon unan, hag eus a-greiz hor c'halon, lavaromp bennoz d'ezan evit kement a vadelez a ziskouez bemdez en hor c'henver.

MELEGAN.

=====

— Jobig, petra 'garfes gwelloc'h beza : archer war droad pe archer war varc'h ?

— O ! Archer war varc'h, sur !

— Perak 'ta ?

— Evit en em denna buanoc'h, ma en em gavfe laëron ganin !...



Bec'h d'an digareziou...

Pa vez komzet da dud a zo eus tec'hout diouz kement tra a zoug d'ar pec'hed : dansou, kompagnuneziou fall, sinemaioù dizonest, c'hoariou danjerus, kazetennou ha leoriou kontrol d'ar feiz ha d'an onestiz, h. a., neuze e respontont d'eoc'h buan a-walc'h ar c'homzou-se :

« MET ME N'OUN MUI EUR C'HROUADUR ! »

Hag o devez c'hoant da rei da anaout evel-se n'eus mui riskl ebet evit o ene en okasionou a bec'hed-se.

N'oc'h mui bugale ?

Kredi a-walc'h a rafen, daoust ma n'eus ket c'hoaz kalz a varo dindan ho fri, paotr yaouank, daoust ma n'eus ket c'hoaz gwall-bell 'zo, plac'h yaouank, ho peus dilezet barlen ho mamm.

Dre hoc'h oad, en ho korf, n'oc'h mui bugale, sur eo, met aon am eus ivez na vefec'h mui bugale en hoc'h ene.

Hor Salver Jezuz Krist a boke d'ar vugale, a skuilhe e vennoz warno hag a lavare d'ar re a glaske o c'has kuit dioutan : « *Lezit anezo da zont davedon. E gwirionez, ma ne zeuit ket da veza henvel ouz ar vugaligou, n'ho pezo ket dor zigor e Rouantelez an Nenvou.* »

Beza henvel ouz ar vugale a zo kaout eun ene glan, eur c'horf digailhar.

N'oc'h mui bugale ! Allas ! Ho komzou her ro a-walc'h da anaout. Abalamour ma 'z oc'h bras breman, e kav d'eoc'h ez oc'h aotreet da gemer plijadureziou difennet.

Pebez fazi !

Ar pezh a zo difennet d'ar bugel, a zo ivez difennet ouzoc'h, rak n'eus nemet eul lezenn, ar memes hini evit an holl.

Met dre ar c'homzou-se, sur a-walc'h, ho peus c'hoant da lavaret ez oc'h breman krenv a-walc'h evit herzel ouz an okasionou a bec'hed ; fellout a ra d'eoc'h lavaret n'oc'h mui dinerz evel bugale. Diouallit mat.

« *An neb a gar beza en argoll, a vezo kollet* », a lavar d'eomp ar Spered-Santel.

Bemdez, nag a dud, tud yaouank dreist-holl, a weler o koueza !

Nann, e gwirionez, n'oc'h nemet bugale e-kenver an okasionou a bec'hed. Ret eo d'eoc'h tec'hout. Anez-se ez oc'h sur da veza kollet.

Met n'ho peus ket c'hoant da dec'hout, ar c'hontrol eo. Kredi a rit zoken lavaret :

« ME A C'HELL GWELET, KLEVET, LENN PEP TRA. »

E gwirionez ; ar GALLOUD ho peus da welet, da glevet, da lenn pep tra, met ar GWIR n'ho peus ket.

Eu lezenn a zo, lezenn Doue hag an Iliz, hag al lezenn-se a zifenn ouz ar gristenien tanva ar plijadureziou a c'hell beza noazus d'o ene.

Met, va zud keiz, n'oun ket touellet an disterra gant ho komzou. N'eo ket : « me a c'hell » ho peus c'hoant da lavaret, met « Me a fell d'in gwelet, klevet, lenn pep tra, me a fell d'in gouzout dreizoun va-unan. »

Mat ! Pegwir ho peus c'hoant da danva pep tra evidoc'h da c'houzout peseurt blaz a zo gantan, kit da di an apotiker ha tanvit kement kontamm a zo er stal. Gwelit dreizoc'h hoc'h-unan ha gouest eo ar c'hontammou-se da rei taol ar maro d'an den.

— Ne deomp ket ! a respontit-hu rak-tal. Gouzout mat a reomp e c'hell an traou-se laza eun den.

— Met penaos 'ta her gouezit ? N'ho peus ket o zanvaet.

— Nann, ha n'hon eus c'hoant ebet d'hen ober, met tud hag a oar, o deus hen diskleriet d'eomp, hag ouspenn, tud hag o deus o c'hemeret, a zo marvet.

— Diskiant ma 'z oc'h ! E-kenver ar c'hontamm, ho peus fizians en apotiker, ha ne fell ket d'eocho kredi medisined an ene, pa lavaront d'eocho : « Taolit evez ! Ar blijadur-se a zo er c'hontamm evit hoc'h ene ; rei a ray ar maro d'ezan. »

Ne gredit ket, goude gwelet kemend-all a dud taget gant an ampoezon-se !

Ma 'z oc'h bet en ospitaliou bras, e tiez an dud diot, ho peus gwelet ez eus eno tud a bep oad kaset di kalz anezo gant an dizurziou. O c'horf pe o spered a zo klanv-bras. M'hel lavar d'eocho, o eneou, peurliesia, n'emaint ket en eur stad gwelloc'h.

Marteze ne fell ket d'eocho kredi. Marteze zoken e lavarit gant tud a zo :

« NE WELAN KET E-PELEC'H EMAN AN DROUG. AN HOLL DRAOU-SE NE REONT SEURT EBET D'IN-ME ! NE SANTAN NETRA. NE BEC'HAN KET. »

Ne santit netra ? Allas ! neuze n'oc'h mui eus an dud veo, rak n'eus nemet an dud varo ha ne santfent ket nerz ar c'hontamm.

Ampoezonet oc'h dija, ha setu perak an ampoezon ne ra mui droug ebet d'eocho. Maro eo hoc'h ene, maro dre ar pec'hed.

Ma ne welit ket e vez ho spered o sonjal e traou fall, e vez ho kalon ouz o c'hoantaat, ez oc'h dija kustum da sonjal en traou-se, d'o c'hoantaat ...ha marteze d'o ober.

Ma kredfec'h dreist-holl lavaret : « Goude ma sonjfen en traou-se, goude m'o c'hoantafen, goude m'o rafen, peseurt droug a ran. » ma kredfec'h lavaret kemend-all, neuze eo mall-bras d'eocho deski ho katekiz ; n'ouzoc'h mui ho relijion, m'ho peus he desket eur wech bennak.

Ne welit ket e-pelec'h eman an droug, dre m'eo dallet ho spered gant kenteliou fallakr enebourien Doue hag an Iliz, ne santit mui netra ebet, dre m'eo maro ho koustians.

Siouaz ! Na doun oc'h kouezet dija er pec'hed !

« Me ne bec'han ket »...

Gouzout a ran ez eus tud ha n'int ket ken troet ha re-all gant ar plijaduriou difennet.

Ar re-se, o lakaat ne santfent netra ebet e gwirionez, a dle evelato tec'hout diouz an okasionou a bec'hed. Rak traou a zo hag a zoug d'ar pec'hed dreizo o-unan. Evel-se S. Yann Krizostom a lavar eman an diaoul e-lec'h ma vez danset. Hogen risklus bras eo evit n'eus forz piou beza e kompagnunez an diaoul.

Ar c'hont Bussy de Rabutin a anzav eo diaes, zoken d'ar ra a vez pell diouz ar bed, chom glan : « Penaos neuze, emezan, e chomfe glan an dud er saliou-se eman enno pep tra o tougen d'ar pec'hed. »

Ar pez a lavarer diwar-benn an dansou, a c'heller lavaret ivez eus an traou all a zoug d'ar pec'hed.

N'eus fors penaos, ar skouer fall a rofec'h, a ra d'eocho an dever da dec'hout rak an traou-se.

BROGAROUR.




1. — Kar ar bedenn ha lenn ar Skritur-Sakr.
2. — Taol evez war da skianchou ha da spered ; na vez re droet gant den ebet.
3. — Gouarn da deod, na lavar morse ger droug ebet diwar-benn ar re n'emaint ket dirazout.
4. — Na embann ket kement tra ac'h eus klevet diwar goust an nesa, ma 'z eo kontrol d'e vrud vat.
5. — Na varn den ebet nag a gomz nag a galon.
6. — Sonj alies er c'hrasou ac'h eus bet digant Doue ; sonj ez pec'hejou, en eürusted ar baradoz, e poaniou an infern, ha chom atao war an hent mat.

S. BONAVANTUR.

KLOERDI NEVEZ KEMPER



a zo bet benniget d'ar 11 Here diweza gant an Aotrou Mignen, Arc'heskob Roazon.



A gleiz e weler ar chapel a zo bet kaset eus ar seminer koz da Gerfeunteun hag a zo bet konsakret d'an 10 a viz Here gant an Aotrou Duparc, eskob Kemper.

KENTELIOU AN AVIEL

AR RE A ZO GWALL-SKOUERIET ABALAMOUR DA JEZUZ



Hor Salver Jezuz en doa, en eur echui, lavaret ar c'homzouman da ziskibien Sant Yann-Vadezour : Eürus ar re ne vezint ket gwall-skoueriet abalamour d'in. » Petra 'felle d'ezan lavaret o komz evel-se ?

Daoust d'ezan da veza Doue, Jezuz ne ziskoueze a-zianveaz nemet beza eun den evel ar re-all, ha memes unan eus ar re zistera. Lavarout a rae c'hoaz e oa-hen ar Mesiaz. Met ar Juzevien, evel m'am eus hen diskouezet d'eoc'h, a oa o sonj en eur Mesiaz, eur Salver hag a vije bet roue evel ar re-all : danvez, enoriou, servicherien hag ofiserien en-dro d'ezan, unan hag a vije deut da veza mestr en e vro hag en dije lakaet ar Juzevien, e genvroiz, da veza

mistri, int ivez, war an holl boblou eus an douar.

Gwall-skoueriet e oant eta, pa glevant eun den evel Jezuz, paour ha dister evit eur gwel, o tiskleria e oa-hen ar Mesiaz. Ha brasoc'h skouer fall o doa bet c'hoaz diwezatoc'h, p'o doa e welet e-pad e Basion dalc'het ha liammet, barnet, kondaonet ha lakaet d'ar maro evel ar brasa torfetour. Setu perak e lavaras Jezuz ar c'homzouman :

« Eürus ar re na vezint ket gwall-skoueriet abalamour d'in-me. »

Evel p'en dije lavaret : Eürus ar re a vo beo o feiz, ma talc'hint d'in en amzer ma vezin disprizet, goapaet, brevet a daoliou ha staget ouz ar groaz !

Hirio, evel gwechall, evel atao, ez eus tud hag a gemer gwall-skouer diwar-benn Jezuz, evel ar Juzevien en e amzer, tud eus ar re zesketa hervez ar bed, ha n'o deus ezomm ebet eus eun Doue krusifiet ! Eun Doue, emezo eun Doue, eun den hag a zo bet goapaet, gwallgaset kement ha staget ouz ar groaz ! Nann, a dra-sur, kement-se n'hell ket beza gwir ; n'heller ket kompren an dra-se ! Ha setu petra a laka kement a dud e-touez ar re ouisiek hervez ar bed, da nac'h Jezuz Krist ha da zisprizet e lezenn hag e Iliz.

Noc'h ket eus ar re-se, c'houi, Kristenien. Kredi a rit, c'houi, ha kredi start, e Jezuz-Krist, gwir Doue, hag en Iliz en deus savet. Adalek an oad tenera, ez oc'h bet desket gant ho tad hag ho mamm da blega dirak Jezuz Krist krusifiet ha d'he adori evel Doue. Hag hen deski a rit, c'houi ivez, d'ho pugale.

O, eürus oc'h-c'houi, V. B. K., hag eürus ho pugale war eun dro ganeoc'h, dre n'oc'h ket evel an dud ourgouilhous a gomzan anezo gwall-skoueriet gant Kroaz Jezuz Krist ! Hag eürusoc'h c'hoaz eun devez da zont, rak ar feiz beo hoc'h eus, a raio d'eoc'h beza digemeret e baradoz an Aotrou Doue.

Marteze war an douar-mañ e vo graet goap ac'hanoc'h, dre ma talc'hit d'ho relijion ha ma chomit kristenien a feiz. Lezit ar re fall d'ober goap, rak eun devez a deuo, ma lavarint, hervez komz ar Skritur-Sakr :

« Ergo erravimus ! — Faziet hon eus. Ni a oa re ziskiant. E-pad mat vevemp war an douar, ni a rae goap ouz an dud dister hag ar gristenien vat diwar ar meaziou ; ha ni a lavare e oant tud diskiant o kredi e Jezuz hag en e Iliz. Ha setu int breman e-mesk ar Sent e baradoz an Aotrou Doue ha ni gant an diaoulou en ifern ! »

E-leiz a dud hirio a zo henvel ouz Juzevien amzer Hor Salver. Ar Juzevien a gemere gwall-skouer diwar-benn Jezuz, daoust d'e viraklou bras, abalamour ma oa eun den evel ar re-all, ha memes eun den a stad izel. Evel-se ivez an dud fall, en hon amzer, a gemer skouer-fall diwar-benn e Iliz, an Iliz en deus savet evit dere'hel e lec'h war an douar o prezeg e lezenn hag o santelaat an eneou. War zigarez n'eo an dud a Iliz, eskibien pe veleien, nemet tud evel ar re-all a zianveaz, kalz a zo ha ne brizont ket kredi eman Doue ganto na senti outo evel ouz Doue e-unan.

Ha koulskoude Jezuz en deus diskleriet e vije bepred ganti betek fin ar bed, hag e gwirionez, goude beza he savet, diskouezet en deus dre ar merkou splanna eman ganti hep ehan. Ha ne vefe nemet m'he deus padet dija ouspenn naontek kant vloaz hep n'en defe gelllet an ifern hag an dud fall he diskar ha dont a-benn anezi, kement-se a zo a-walc'h evit hol lakat da gredi eman bepred Doue ganti d'he harpa. Ouspenn, ar santelez a sked e kement a vugale d'an Iliz, ar miraklou ken stank en em gav enni hag enni hepken, nerz-kalon kement a verzerien a bep anzer hag a zo bet gwelloc'h ganto skuilh o gwad ha beza lakaet d'ar maro eget nac'h o feiz ha trei kein da Jezuz Krist, an holl draou-se a verk sklaer eman ganti, ha n'eo ket gant hini all, ar wir relijion.

Kement-hini n'eo ket direizet e spered gant e vuhez fall, a gompren mat kement-se. Mat, selaouit an dud fall hag ourgouilhous o lavarout : Me ne gredan ket er pezh a brezeg ar veleien, rak me zo ken desket pe desketoc'h egeto. Me ne din morse da zaoulina dirak eun den evel-doun ha ne fell ket d'in kofes va fec'hejou, m'am eus, nemet da Zoue hepken. Me, ne d'in ket da gaout ar beleg evit gou-

zout gantan petra d'ober ; an dra-se ne sell ket outan. ha n'em eus netra d'ober gantan ; me oar mat-me petra am eus d'ober.

Setu aze, V. B. K., ar pezh a glever, memes marteze en ho mesk c'houi, tud badezet, tud hag a fell d'ezo koulskoude beza kemeret evit kristenien. An dud a gomz hag a ra evel-se, n'int ket gwir gristenien ; kristenien fall int kentoc'h, dre ma kemeront skouer fall diwar-benn Jezuz evel ar Juzevien gwechall ha dre ma ne fell ket d'ezo kredi eman Jezuz gant an Iliz, hag enni gant ar Pab, an Eskibien, ar veleien, hervez ar gomz en deus lavaret : « An neb ho selaou, va selaou, hag an neb ho tisprij, va disprij-me. »

MIZ DU 1933

De iziou !	GOUELIOU	Induljansou
1 M	GOUEL AN HOLL SENT.....	A. J.
2 Y	GOUEL AN ANAON. — I. V. da c'hounit evit an Anaon ken lies gwech ma 'z eor d'an Iliz.....	
3 G	D. E. Raynier 1 U.....	
4 S	S. Charlez E.....	
5 S	22 ^o goude ar Pantekost.....	
6 L	P. E. Marc'harit a Loren G. 2 U.....	
7 M	P. E. Helena Enselmini G. 2 U.....	
8 M	Eizved gouel an Holl Sent.....	
9 Y		
10 G	S. Andre Avellino.....	
11 S	S. Martin E.....	
12 S	23 ^o goude ar Pantekost.....	
13 L	S. Didas 1 U.....	I. V.
14 M	S. Jozafat E. M.....	I. V.
15 M	S. Albert E. D.....	
16 Y	Santez Agnez a Asiz G. 2 U.....	I. V.
17 G	P. E. Salome G. 2 U.....	
18 S	Gouel Bedi Itizou S. Per ha S. Paol.....	
19 S	24 ^o goude ar Pantekost — SANTEZ ELIZABED int. 3 U.....	
20 L	S. Felix a Valois.....	
21 M	Gouel Mari kinniget d'an Templ.....	A. J.
22 M	Santez Sesilia, G. M.....	
23 Y	S. Klemant, P. M.....	
24 G	S. Yann ar Groaz.....	
25 S	Santez Katel G. M.....	A. J.
26 S	25 ^o goude ar Pantekost — S. Leonard K 1 U.....	I. V.
27 L	D. E. Bernardin a Possa 1 U.....	
28 M	S. Jakez a March K. 1 U.....	I. V.
29 M	Gouel an Holl Sent eus teir Urz S. Fransez..... (I. V. all evit an Drede-Urz o renevezi ar Prof.)	I. V.
30 Y	S. Andre, abostol.....	

Un bulletin paroissial pour chaque paroisse

grâce aux combinaisons de «La Vie Chrétienne»

(Edition française et édition bretonne)

Combinaison A

Les adhérents de la combinaison A reçoivent :

1° — Pour un minimum de 100 exemplaires.

4 PAGES de texte paroissial (servant de couverture) et 16 PAGES de texte commun (FRANÇAIS, BRETON DE QUIMPER ou BRETON DE VANNES, SUIVANT LE DÉSIR DE CHAQUE ABONNÉ).

La page 1 de la couverture comporte un CLICHÉ-TITRE FOURNI PAR NOUS (nous envoyer photos, cartes postales, pour faire exécuter le dessin).

Le bulletin est livré PIQUÉ, ROGNÉ et est EXPÉDIÉ PAR LA POSTE à chaque abonné. — Le premier numéro est fourni largement en vue de la propagande, à raison de 1 exemplaire par famille. — Sauf avis contraire, nous corrigeons nous-même toutes les épreuves.

Abonnement : 8 fr. par an.

2° — Pour un minimum de 400 exemplaires.

8 PAGES de texte paroissial et 16 PAGES de texte commun. Les autres conditions sont les mêmes que pour le 1°.

Abonnement : 8 fr. par an.

Combinaison B

Nous livrons sans pagination les 16 pages intérieures de « La Vie Chrétienne » (édition française ou édition bretonne). — Cette combinaison permet au clergé paroissial de faire imprimer ou de polycopier lui-même sa partie spéciale.

Prix : les 50 exemplaires..... 9 fr. franco

— les 100 exemplaires..... 16 fr. franco

Le prix au cent sert de base pour toute quantité au-dessus de ce chiffre.

Envoi sur demande de tous renseignements complémentaires et de spécimens gratuits de bulletins paroissiaux.

Le Gérant : G. LE BAYON.